

DEUT, SALVER AR BÉD

Komzou : Saik Falhun

An Azvent Ton : "Creator alme siderum"



1. Deut, Sal - ver ar Béd, dis - ken - nit Ha diouz Sa - tan on di - li - vrit;
 2. Greet e be - hed, on tad A - dam A ran - kas kui - taad an E - den:
 3. La - va - ret ho - poa da A - dam, Gand an diaoul pa oa bet tre - het,
 4. Mo - i - zez hag ar Bro - fe - ted Euz ar bu - gel - se 'deus kom - zet:
 5. P'er - ru - as an am - zer mer - ket, Ha gan - tañ eur c'haer a ge - lou.
 6. "Gwer - hez Va - ri, e - me 'n Ar - hêl, Ke - menn 'ran deoc'h a - berz Dou - e:
 7. Tru - ga - rez deoc'h, Ao - trou Dou - e, D'hoc'h an - (n)o mil ha mil ben - noz;



1. Dis - ken - nit euz ar Ba - ra - doz, Ni zo pell 'zo ouz ho kor - toz.
 2. A - ba - oe, 'vel - dañ, pe - béz samm N'on - eus ket ni ran - ket dou - gen!
 3. E teu - fe eur Mab hag e Vamm Da flas - tra e benn mil - li - get.
 4. E c'hloar, e vu - ez hed - a - hed A zo bet gan - to dis - ku - liet.
 5. Eun Ar - hêl a - berz an Ao - trou A zeu - as be - teg Na - za - red.
 6. Ge - nel a re - ot eur bu - gel, Sal - ver ar béd hag e Rou - e."
 7. Grit deom ar c'hras da vond eun de D'an eü - rus - ted er ba - ra - doz.

1. Deut, Salver ar Béd, diskennit
Ha diouz Satan on dilivrit;
Diskennit euz ar Baradoz,
Ni zo pell 'zo ouz ho kortoz.
2. Greet e behed, on tad Adam
A rankas kuitaad an Eden:
Abaoe, 'veldañ, pebéz samm
N'on-eus ket ni ranket dougen!
3. Lavaret ho-poa da Adam,
Gand an diaoul pa oa bet trehet,
E teufe eur Mab hag e Vamm
Da flastra e benn milliget.
4. Moizez hag ar Brofeted
Euz ar bugel-se 'deus komzet:
E c'hloar, e vuez hed-a-hed
A zo bet ganto diskuliet.
5. P'erruas an amzer merket,
Ha gantañ eur c'haer a gelou.
Eun Arhêl a-berz an Aotrou
A zeuas beteg Nazared.
6. "Gwerhez Vari, eme 'n Arhêl,
Kemenn 'ran deoc'h a-berz Doue:
Genel a reot eur bugel,
Salver ar béd hag e Roue."
7. Trugarez deoc'h, Aotrou Doue,
D'hoc'h ano mil ha mil bennoz;
Grit deom ar c'hras da vond eun de
D'an eürusted er baradoz.

VIENS, SAUVEUR DU MONDE

1. Viens, Sauveur du Monde, descends Et délivre-nous de Satan ; Descends du Paradis, Nous T'attendons depuis longtemps.
2. Lorsqu'il pécha, notre père Adam Dut quitter l'Eden : Depuis, comme lui, quel fardeau Nous avons dû porter !
3. Tu avais dit à Adam, Quand il avait été vaincu par le diable Que viendraient un Fils et sa Mère Pour écraser sa maudite tête.
4. Moïse et les prophètes Ont parlé de cet enfant. Sa gloire, sa vie entière Ont été dévoilées par eux.
5. Quand arriva le temps marqué, Et portant une bonne nouvelle Un ange de la part du Seigneur Vint jusqu'à Nazareth.
6. "Vierge Marie, dit l'ange, Je vous annonce de la part de Dieu : Vous enfanterez un enfant, Sauveur du monde et son Roi".
7. Merci à Toi, Seigneur Dieu, À ton Nom mille et mille mercis; Fais nous la grâce de parvenir un jour Au bonheur du Paradis.